

Otro K/neve.

An otro K/neve en devez gret
Ar pes ne raje dichentil e bed,

Nag an devez gret eur lestr neve
Ewit kas da brezant dar Roue.

Laket e mab enan da vont gati,
Ag e vibien al mer da idi.

E vab enan a lavare
Dan otrou K/neve ag an de-se :

– Va zadik paour ma nem Gheret
Gant ar lestr neve nem c’hasset ket

Gant ar lestr neve nem c’hasset ket
Gant va breudeur all me vo lac’het.

Otrou K/neve a respontas
De vab enan pa en c’hievas :

– Bea droug gant an eb a garo
Gant ar lestr newe c’houi a iello.

En douar Sant Ian a vo karghet
En douar neve en e lezfet.

An otro a K/neve a lavare
Gant e lestr neve pa partie :

Otrou Doue petra a rin
An douar Sant Ian pa kiniadin

Kri e vo va c’halon ma ne rann
Pa kolin ar goel a tour Sant Ian.

En chonjal em douç Mari pole
Ounes zo klac’haret va goude.

E vreur kadet a lavare
Dan otrou K/neves ag an de ce :

– Diles res te Mari pole
Pe breman souden kol ta vue ?

An otrou K/neve a lavare
De vreur kadet ag an de ce :

– en an' Doue nem lac'het ked
Va zollet en tu var eur garek.

Ne voa ked e c'hir peur lavaret
E kreis ar mor donn ne voa sklapet.

Tri de a teir nosfes e he bed
en kreis ar mor donn var eur garek.

Eb kallout na dibi nag eva
na cessi eur moment da woella,

Chonjal en e Zouç(1) Mari Pole
Onez a voa c'hlac'haret e goude.

Eur listr e zond a zouar Sant Ian
A remerk anean ker buan.

Ag ar mestr a lestr divar ar pont
A deuas de remerk dre renkontr.

– Me vel eur martollot fortuniet
E kreis ar mor Donn var eur garek

E kreis ar mor Donn var eur garek
Red e dem tachout mont de vellet

Otrou Guerneve a c'houlenne
Deus an dud a lestr po sallude :

– Tud chentil dime leveret
Deus a pe sort douer e deuet ?

An dud a lestr a respontas
Dan otrou K/neve pe klevas :

– Deus an douar Sant Jan a deuomp
Var ar douar neve e c'heomp.

An otrou K/neve a lavare
Nan dan dud a lestr an de ce :

– Dud chentil, emean, ma nem c'heret
Grit eur plijadur em andret :

Ma renter en douar St Jan fete
Me pec dec'h o peach douar neve ?

An dud a lestr a respontas
Dan otrou K/neve pa en klevas :

– Deud ebars ar lestr ag ambarket
Ni on lakai en douar assuret.

Otrou Kerneve a vonjoure
En ti ar pole kos pa errue :

– Dibonjour a joa bars an ti man
Mari ar polar pelec'h e man

Ar Poleo kos a dal e dan
A teuas da respont ken buhan :

– e man duze en e goelle
eur mab bihan en e goste

eur mab bihan en e goste
A tamal dan otrou K/neve

De eureuji ne deuiio ked
Rag klevet on deus e he beuet.

Otrou K/neve vel ma klevas
Gant ar vins dan ec'h prompt a pignas

Gant ar vins dan ec'h prompt a pignas
Mari ar poleo a salludas.

— sevet deus o kouelle mari
Ma c'heomb da Sant Ian da eureugi.

ma vomb dimeet ag eureuget
Bars ma arruo ma breur kadet

Dimeet int bed ag eureuget
nag ar bughel legitimet

Nag ar bughel legitimet
Bars na he arriet ar c'hadet.

Au 31 recto, seulement titre, écrit à l'encre par Penguern : Otro K/neve.

(1) Le z de Zouø, écrit en surcharge sur un d.